


# ILIZ NEVEZ PLOUESCAT

CONSACRET

ANT AN AOTROU SERGENT,

ESCOF QUIMPER,

AN 31 A VIZ EOST 1865.



Meulomp Doue, gant levenez,  
Dleour omp oll d'he vadelez;  
Meulomp ive Plouescadis,  
Eun dezho, great ho ilis!

O Breiz-Izel! an oll er goar,  
Er bed da feiz a zo da c'hloar,  
Eun deiz, en Env, da wir greden  
A vo ive da gurunen.

Ar Vreizidi den ne gano,  
Plouescadis hep na veulo;  
Pet bro, siouaz! a goll ho feiz,  
E Plouescat, e cressk bep deiz.

Doue bepret madelezus  
A rent ho bro meurbet edus,  
Dezho ar mor, en he gounnar,  
A ro bizin, 'vit ho douar.

Plouescadis 'zo anaoudek,  
Evit Doue hint kalonek ;  
N'euz hirio dèn hep lavaret :  
Caëra ilis ho d'eus savet !

Pebez enor ! Plouescadis,  
Da vestr ar bed great eun ilis ;  
Mennoz David, hed he vuhez,  
Roet dec'houi, gant trugarez.

Euz ho tud coz ar relegou  
A dle tridal, en ho besiou,  
O velet feiz ho bugale  
O sevel eun ti da Zoue.

An ilis-ze d'an tremeniad  
D'euz ho feiz cren 'vo eur merk mad ;  
Ho pugale, gant oc'h hano,  
Huel ho fen a valeo.

Roue an Env, mestr an douar  
'Zo en ilis cuzet he c'hloar ;  
Eno e ro brassa graçou  
Hag e skanva an oll boanniou,

Eno eur vam garantezus  
'D'euz bet iec'hed d'he merc'h clanvus ;  
Dre he feden, eur mab diroll  
A zo hirio eur skouër d'an oll.

An dèn, allas ! pa deu er bed,  
A zo euzus, dre ar pec'hed :  
Er mæn-found 'vez rentet skedus  
Ha crouadur great da Jesus.

En ilis omp, gant hor Roue,  
Great soudardet euz he arme,  
'Vit da Satan ober brezel,  
Covez hor feiz bepret huel.

Eno Jesus, guir garantez  
D'hon ene 'vez magadurez:  
En hosti 'ma var an aoter,  
'Vit hor selaou, e pep amzer.

An dèn pec'heur, par d'ar prodik,  
Pell d'euz Doue 'vev reuseudik;  
En Templ e cav, er binijen,  
Graç ha pardoun, dre n'absolven.

En ilis c'hoaz, an daou bried  
Da virviken 'zo eureujet,  
Evit beva, ervez Doue,  
Sevel ervad ho bugale.

Euz ar gador ar wirionez  
Oc'h kelennet, gant karantez.  
Var ar vuhez a dleït da ren,  
'Vit caout, en Euv, eur gurunen.

D'oc'h ilis! ta, labourerrien,  
Deut alies, bepret laouen,  
Evit guellout, 'creïz ho labour,  
Trec'hi Satan, oc'h enebour.

Dious ho tal, var an dachen,  
Pa ziruille droz ar c'houezen,  
Gant ho lagad, claskit neuze  
An ti ho p'euz great da Zoue.

Savit buhan tour an ilis ,  
Neuze 'clevoc'h , Plouescadis ,  
Beteg ar mor hac he reïer ,  
Ar zoun skiltrus euz ho kleïer .

Tour he ilis d'eul labourer  
D'euz feiz he vro 'zo ar bannier ;  
Evit ma vo guelet a bell  
Ar bannier-ze savet huel .

Bennoz , bennoz , Plouescadis ,  
Da veza great ken caër ilis ;  
Digollet viot , bras ha bihan ,  
Doue 'ro mil evit unan .

Bennoz brema , ha greïz kalon ,  
D'ar veleïen , d'an daou berson ;  
Poanniet ho d'euz gant oc'h ilis ,  
Sonjit enno , Plouescadis .

Bennoz ive , broïz , bennoz  
D'an hini 'zo er baradoz ;  
He hano 'zo ê pep guinou ,  
He garantez , er c'halonou .

DÉPOSÉ :

J. H.